

TROIAD

SINEMA E BREZHONEG EVIT AR SKOLIOÙ
KENURZHIET GANT DAULAGAD BREIZH

FICHENNOÙ AR SKOLIDI
Kinniget gant Daoulagad Breizh



**Ur Gitar
er mor**

Ur film bevaat
sevenet gant Sophie Roze



Heuzoù-nnoz

Ur film bevaat sevenet gant Pierre-Luc Granjon

Ur programm 2 film

2025 / 42 mn / Frañs / Little KMBO - Advouezhiañ e brezhoneg : Dizale
Skignañ : Daoulagad Breizh / 02 98 92 97 23 / www.daoulagad-breizh.org

FICHENN 1 AN ISTORIOÙ

Mesklet eo bet fotoioù an 2 film.


Kelc'hit fotoioù ar film 1/ Heuzoù-noz e du ha fotoioù **ar film 2/ Ur gitar er mor** e ruz ha lakait anezho en urzh gant sifroù.



Eliot a gej gant ar c'hrouadur



An heureuchin hag ar gaerell-vras a gej gant ar c'hapibara



Eliot a zistro d'ar ger



Ar gaerell-vras a glask gwerzhañ he c'hraatennoù da loened an ti-feurm




Ar gaerell-vras hag ar c'hapibara a adkav ar c'hoati



Eliot a zo ouzh taol gant e familh




Ar gaerell-vras a gej gant an heureuchin



Eliot a red betek ar c'hoad

FICHENN 2 BINVIJI AR FILM

1) Gant peseurt binviji pe objedoù e vez graet sonerezh er film ? Livit anezho ha liammit pep hini ouzh ur benveg all deus ar memes familh.





2) Setu anvioù an holl vinviji hag objedoù : skriv anezho pe lak ar sifr dindan ar poltred a zere.

1. Violoñs
2. Gitar
3. Malizenn
4. Boest-an-diaoul
5. Bandoneon
6. Djembe

3) Gwelet peus marteze e-touez ar skeudennoù a-us ez eus un objed a vez implijet evel ur benveg sonerezh, padal n'eo ket sañset bezañ. Peseurt hini eo? Gra ur c'helc'h tro-dro dezhañ.

FICHENN 3 AN DAÑS

1) E-barzh ar film “Ur gitar er mor” e vez gwelet al loened o tañsal un dañs a-orin deus Amerika ar Su. Ar bandoneon, benveg ar c’hapibara, a zo pouezhus-tre er sonerezh-se. Peseurt anv he deus an dañs-se ? Dibab ar respont mat.



An dañs klasel Ar swing An tango Ar charleston

2) Sell mat deus ar peder skeudenn-mañ. Peseurt hini a ziskouez ar memes dañs eget er film ? Gra ur groaz dirak ar respont mat ha skriv anv an dañs amañ dindan.



3) Anavezout a rez dañsoù all a vez dañset daou ha daou ?
Skriv o anvioù amañ dindan :

.....

.....

FICHENN 4 DEGEMER HA RANNAÑ

E-barzh an daou film e vez gwelet an tudennoù alies o tegemer tudennoù all, pe oc'h ober profoù dezho.

Kemer harp ouzh ar skeudennoù evit respont.

1) E-barzh Heuzoù-noz

Peseurt tudenn a bed eben da gousket en he zi ?

Lak ar gerioù-se en urzh evit respont :

A BED - AR C'HROUADUR - AR PAOTRIG

.....



2) E-barzh Ur gitar er mor

Piv a bed al loened all da evañ un evaj dianav tro-dro d'an tan ?

Liv ar respont mat.

1 AN EUREUCHIN

2 AR GAERELL-VRAS

3 AR C'HAPIBARA

4 AR C'HOATI



Soñj peus deus anv an evaj ? Liv ar respont mat.

1 KAFE

2 CHOKOLAD

3 JUG FROUEZH

4 MATE

3) E-barzh Heuzoù-noz

Ar paotrig a ra ur prof d'ar c'hrouadur. Petra eo ?

Liv ar respont mat.

1 HEUZOÙ

2 UR MADIG

3 UR GITAR

4 UR GRAVATENN



Petra 'c'hoarvez d'ar c'hrouadur, neuze ? Liv ar respontoù mat. Ouzhpenn ur respont a zo !

1 FULORET EO

2 SOUEZHET EO

3 LAOUEN EO

4 TRIST EO

FICHENN 5 BEZAÑ KOMPRENET

1) Pa vez gwelet ar gitar gant ar c'hapibara, ober a ra un dresadenn d'ar gaerell-vras ha d'an heureuchin evit displegañ ar pezh 'n eus c'hoant lâret. D'az soñj, petra a dalvez ? Skriv ar frazenn a fellfe dezhañ lâret.



.....

.....

.....

2) Ar gaerell vras hag an heureuchin a glask displegañ d'ar c'hapibara an titouroù roet gant al labous diwar-benn ar c'hoati. An heureuchin a jestraou pep ger evit ma vefe komprenet gant ar c'hapibara. Dit da liammañ pep jestr ouzh ar ger a glot :



Ar wezenn



Ar c'hoati



Ar gitar

FICHENN 6 AR GWAGENNOÙ

1) Sell mat ouzh an teir skeudenn tennet diouzh ar film. Petra a welez outo?

.....
.....

Peseurt liv a vez gwelet dreist-holl ?

.....
.....



War peseurt hini deus an teir skeudenn e seblant ar mor bezañ ar muiañ diroll? Peseurt elfennoù a lak ac'hanout da zibab hounnezh?

.....
.....

2) Setu un oberenn graet gant an arzour Hokusai e bro Japan e 1830. Petra a welez outi?

.....
.....



Ijin petra a c'hellfe bezañ titl an daolenn?

.....
.....


Peseurt livioù a vez gwelet dreist-holl?

.....
.....

E-touez an teir skeudenn eus ar film a zo a-us, peseurt hini a denn ar muiañ da daolenn Hokusai? Perak?

.....

FICHENN 7A OBEREREZH DORN *Ar c'hoad gant pikoù*



FICHENN 7B OBEREREZH DORN Ar c'hoad gant pikoù

